



PRIZIOÙ RANNVROEL DAZONT AR BREZHONEG 2006



REOLENNOÙ

Mellad 1 : Kuzul-rannvro Breizh en deus roet ar gefridi da Ofis ar Brezhoneg sevel "Prizioù Rannvroel Dazont ar Brezhoneg". An intrudu-mañ zo e bal talvoudekaat obererezhioù skouerius d'an holl evit ma vo adperc'hennet ar brezhoneg gant ar muiañ ar gwellañ a dud.

Mellad 2 : Evit pep rummad (hiniennoù, kevredigezhioù ha embregerezhioù) e vo rannet ur yalc'had a 4.000 euro. Tri zeuliad a vo priziet e pep rummad ha dasparzhet e vo ar yalc'hadoù evel-mañ : 2000 euro d'an hini kentañ, 1500 euro d'an eil ha 500 euro d'an trede.

Mellad 3 : An hiniennoù a yelo ar priz ganto a vo tud en tu all da 18 vloaz . En dibab graet e vo lakaet ar pouez war an dramañ : ober war ar pemdez gant ar brezhoneg en o familh ha/pe war o lec'h labour. Digor eo ar priz d'an holl, e Breizh pe e-maez Breizh .

Mellad 4 : Ar c'hevredigezhioù a vo roet ar priz dezho o do lakaet ar brezhoneg da vezañ implijet da vat en o mont en-dro diabarzh koulz hag en o mont en-dro diavaez. Digor eo ar priz d'an holl gevredigezhioù forzh pe hini e vefe o zachenn oberiantiz. Evezh bras a vo taolet avat ouzh ar c'hevredigezhioù n'eo ket o fal kentañ kas yezh ha sevenadur Breizh war-raok.

Mellad 5 : An embregerezhioù a c'hounezo ar priz o do sevenet ur raktres pe meur a hini a-benn implijout ar brezhoneg en o obererezhioù diavaez pe en o mont en-dro. Digor eo ar Priz d'an holl embregerezhioù.

Mellad 6 : Ar Prizioù a vo roet bep bloaz da vare Gouel Erwan, e kreiz miz Mae.

Mellad 7 : Dilennidi eus Kuzul-rannvro Breizh a yelo d'ober ar strollad-barn, skoazellet gant dileuridi eus Ofis ar Brezhoneg.

Mellad 8 : Digant Ofis ar Brezhoneg e vez goulennet an teuliadoù enskrivañ. An teuliadoù karget gant an danvez-loreidi a vo dleet dezho displegañ en un doare eeun an obererezhioù sevenet ganto a-benn gwellaat diorroadur ar brezhoneg. Pep danvez-loread a vo dleet dezhañ degas d'an Ofis ar muiañ ar gwellañ a bezhioù o tiskouez e intrudu evit adperc'hennañ ar brezhoneg, a-raok an 30 a viz Ebrel 2006.

Mellad 9 : Gant ar strollad-barn hepken emañ an dibab ha gwir en deus da chom hep reiñ ar priz en unan pe meur a hini eus ar rummadoù. Gant Kengor pad ar C'huzul-rannvro e vo roet ar prizioù, diwar ginnig ar strollad-barn. En e-unan e ra ar strollad-barn e zibaboù hep na ve tu da zistreiñ warno.